



96

*CANTIC SPIRITUEL*

*Ar Buez Sant Mathurin.*

**C**ompagnuneh ma pliche guenoh ;  
 Clevet, ha me expliquo d'oh,  
 Dre coun, mar guel me voeh pa dign,  
 Darn a vuhe Sant Mathurin.

O Sant Methurin beniguet,  
 Peder evidomp en Dreindet,  
 Ma elhem disquing pep-unan ;  
 Hou miracleu groit er bed-man.

Clevet eta er peh en dez groit ;  
 Pe ne oue hoa meit ur Pautric,  
 Endan en ouet a deuzec ble,  
 Pe un draiq benac goude.

E dud a oue huguenaudet,  
 Nobl, puissant ha forh douget ;  
 Hac en devoa commission,  
 De zistrugign er Gristenion.

Toft dehe e oue un Escop ;  
 Hanvet Policarpe den devot,  
 Hac a enseigne lezen Doue  
 D'an dut yaouanc muy a ma helle.

A

Mathurin a oue yaouanquic,  
 Ha ne oue hoah meit crouaduric,  
 En em gave d'er cheleuer,  
 Lies pa vise e predec.

Pe oue bet gueton ansaignet  
 Ha catholig Romen rentet,  
 E pedas a volante vat,  
 Doue evit e vam hac e dat,  
 Doue a glevas e pedenneu,  
 Hac ou convertiffas hou deu  
 E dat, e vam, oll tut e dy,  
 A zas d'e voutoign e Bleidy.

Pe oue bet Mathurin guet-e  
 D'oh hou anseign el lezen Doue  
 E oue sacret den a Ilis,  
 Ne oue quet vuiguent ble fournis.

Sant Policarpe a pe vuelas,  
 E gourage hac e vertu bras,  
 A ya de Rome hac el lefas  
 En e Escopti en e blace.

Un trefor bras a santeldet  
 A oue en Mathurin cuhet,  
 Mais a la fin Doue a vennas,  
 En discoign dre ur miracl bras.

E Rome e oue ur plah yaouanc,  
 Merh Maximian an Tyrant,  
 Hac e oue bet pell possedet  
 Guet an diaoul hep cavoet remed.

A la fin en diaoul a laras,  
 De zat e oue ur folleh bras,  
 Songeal al lamet a nehy  
 Dre forcereh na dre magi.

N'en dez forcer na forcerez  
 A ell me chassin er mez,  
 Que n'en day a France d'e guelet,  
 Ur certen Mathurin hanvet.

Heneh zo un den vertuus,  
 Ur servitour bras de Jesus;  
 Heneh sur em chasso er maise,  
 Hac e laquo Rome en he aise.

Er meme momant ma oue clever,  
 Er gombs-se guet en drouc-speret,  
 E tas haru ez a nehon,  
 Dre quement corn a oue en Rome.

Bras a bihan oll pe glevent,  
 Devat en Ampereur e tent,  
 D'er supliin ar hou teulin  
 De gas tut d'e glafq Mathurin.

En Ampereur a depechas,  
 Souden ur vanden tud d'er c'hlasq,  
 Avertisset oue guet Æl Doue  
 Mathurin d'e vonet guet-e.

Mais el ma hede Romeguet  
 Ar er mor mediterranee,  
 En diaoul a savas un tampest  
 Hac a vennas fouildring hou lestr.

Sant Mathurin a oue coufquet,  
 N'en devoe fonch a drouc er bet  
 Pa glevas tud an Ampereur,  
 E grial oll forh d'er maleur.

Sant Mathurin a dihunas,  
 Hac e guelet en danger bras,  
 a suplias an Autrou-Doue  
 Da arretign en tampest-se.

Er meme momant er mor facher,  
 Ac en avel digabestret,  
 D'e peden prest a obeissas,  
 Hac en oll tempest a cessas.

Sant Mathurin en den sacret,  
 Er yec'het d'ar re affiget,  
 A ras en ur arrue ê Rome,  
 Ne chommas den en e horn.

Merh en Ampereur e oue bet,  
 Forh pell guet en diaoul possedet,  
 Sant Mathurin e delivras,  
 Hac er yec'het dehy a ras.

Mathurin en dez hoah rentet  
 Er vuhe dur voes decedet,  
 Dre e pedenneu ha graç Doue,  
 Evit hoah augmanting ar Fee.

Sant Mathurin en dez lamet  
 Deguet au diaoul tut possedet,  
 Deguet ar marve re dessedet,  
 Cals a re glany deguet clenvet.

En durant ma oue en buhe,  
 Netra d'oh-ton ne resiste,  
 Quement a goulenne d'oh Doue,  
 Er meme momant oll en devoe.

Goude m'en devoe decedet,  
 Hac e gorf en Rome interret,  
 En douar en tout n'en dalhse quet,  
 Rac bout eno ne venne quet.

D'autant m'en devoe ordrenet,  
 Ma vehe e gorf degasset,  
 De vro a Larc'hant da inter,  
 Quent ma has da Rome agler guer.

A pa oue guelet deit er mez,  
 Goude bout interret expresse,  
 Degasset eta oue da Larc'hant,  
 Da ober e enterramant.

De Larc'hant e oue degasset,  
 En Larc'hant e oue interret,  
 E leh m'en dez e relegueu,  
 Ha groit a bep seurt miracleu.

Sant Mathurin a so anavet  
 En quement canton zo er bet,  
 Rac evit bout e gorf er bec,  
 E vertu a bredec bamdee.

Rac-ce evit en inourign,  
 Hac faciloh er supliingn,  
 E hez savet Iliseu caër,  
 Par tout en e inor ha gloer.

E special ê Quistinig,  
 En devez unon magnific,  
 Er Veret tost d'en Ilis vras,  
 Ne gaver quet santeloh place.

Eno e hez Indulgençeu,  
 Hac e ra lies miracleu,  
 Eno ema Sant Mathurin,  
 D'er re glanv ur guir medecin.

Eno peb den a gaff remed  
 D'oh pep seurt drouc ha pep clenvet,  
 Er re varve e gaff er vuhe,  
 A pou goestler guet ur guir fee.

Courage eta, Quistinidis,  
 Bubri, Melran, Guern, Bihuiis,  
 Planiau, Baud, Languedic, Ploue,  
 Hac oll Paresien er hontrée.

Mar ou huez den clan affiget  
 Guet ur fort benac a clenvet,  
 Ne glasquet quet quen medecin  
 Mait an Autrou Sant Mathurin.

Mar fal d'oh cavoet remission,  
 Ag ho fauteu er guir pardon;  
 Deit oll en eil Sul a mis Mai  
 De visiting er Chapel-ze.

O Sant Mathurin beniguet,  
 El maëdoh Coessour ha Bellec,  
 Absolvét en oll peherion,  
 A zay d'ou Chapel d'ar pardon.

El ma d'oh guir medicinour,  
 Pliget gueneoh perpet secour,  
 En oll affiget guet clenvet,  
 A yaye d'ou Chapel d'ou quelet.  
 A celfin goude ma vint bet  
 Guenoh er bed-man secouret,  
 Ma hint oll d'ou trugarecaat,  
 Den Eny devat Doue evit mat.

*F I N.*

